



Dupodiñ

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv?

Adalek ar CE2 en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

Sevel goulennoù,
implijout verboù, ar stumm boaz, ar stumm nac'h

Mont en-dro ar c'hoari :

Ur c'helc'hiad a c'hoarierien azezet.

Unan anezho a bella evit chom hep klevout ar c'hoarierien all o tibab ur verb aes (da skouer : redek, debriñ, pellgomz ...).

Dont a ra ar c'hoarier en-dro ha ret eo dezhañ divinout ar verb en ur ober goulennoù gant pep c'hoarier eus ar c'helc'h. Implijet 'vo gantañ ar verb « dupodiñ » e lec'h ar verb da zivinout.

Liesseurt e ranko bezañ ar goulennoù. Da skouer :

« ha dupodet e vez pa vez debret ? »

« ha dupodet e vez gant an daoulagad ? »

« daoust hag-eñ e tupod al loened ? »

« ha gallout a ran dupodiñ en ur gousket ? »

hag all...

Evezhiadennoù

_ tu zo da lakaat ar c'hoarierien da sevel ur verb evit erlerc'hiañ
_ evit ar respontoù e c'heller goulenn gant ar c'hoarierien implij ar verb « dupodiñ », pe respont gant « ya » hag ar stumm nac'h berr (nann, ne vez ket, ne c'heller ket ...)

_ ret e vo diwall ma vefe implijet ar stumm nac'h reizh e brezhoneg (-nann- a glever alies e-lec'h ar stumm ne... ket)